

KIS-475 – Et. (-)rhe(-)

GE – 12 09 95.

Diwar an hGr. *rJevw* "berañ a ran". Arveret evel lostger hag evel rakger.

A. – Evel lostger en en kaver en termenoù a Vezekniezh gant ar ster "naouez, beradur ul liñvenn eus un organ". Sk. :

Gl. *rhinorrhée* "naouez diwar ar fri", Br. **frinaouez** ; Gl. *aménorrhée* (1790) "ezvezañs ar mizioù", Br. **mizanliñv**.

B. – Evel rakger e vez arveret e lies diskiblezh, gant daou zenotadur pennañ : I. – "Read tredan". II. – "Berad molekul".

B I. – Termenoù rakgeriet gant Gl. *rhé-* o tennañ d'an tredan : 1. – En alvez. 2. – Er beved.

B I 1. – EN ALVEZ :

a) Gl. *rhéographe* (1922) "ardivink o tresennañ argemmadoù read ur red tredan", Br. **readwezer** (sl. KIS-364, La-09, pp. 149 hh.) ;

b) Gl. *rhéostat* (1875) "harzell argemmus o talvout da reoliñ read ur red tredan", Br. **readreoler**.

Boas eur, evit an ardivinkoù, da amprestañ an termen etrevroadel ; kenkoulz all : **reograf**, **reostat** enta.

B I 2. – ER BEVED :

Gl. *rhéobase* (1909) "gwehin izelañ ar read tredan o tec'han an argrezañ en ur gigenn hep bevennañ pad an arloañ", Br. **leiaread** – a-geñver gant al *leiaread* emañ al **leiapad** (Gl. *chronaxie*) "pad arloañ ar red tredan gant daougement al leiaread o spiriñ da zec'han an argrezañ".

B II. – Termenoù rakgeriet gant Gl. *rhé-* o tennañ d'an danvez :
1. – En alvez. 2. – Er beved.

B II 1. – EN ALVEZ :

a) Gl. *rhéomètre* (1844) "trevnad reoliñ kas ur veruzenn argemmus ar gwask enni", Br. **reometr**. Hervez ar c'hevatal Br. dibabet d'ar Gl. *rhéo-* en denotadur-mañ e vo savet un **Xreoler**.

b) Gl. *rhéologie* (1927) "skourr eus ar Fizik o studiañ gludegezh, mezellded, dastennegezh ha berusted an danvez" (termenoù ar re-mañ arveret ganin betek gouzout evel just). Amañ e tegouezhomp er gudenn savet gant YBAN. Evit ar c'hedrannoù en deus arnodet e savan a-du gantañ evit dilezel *liñv-* na glot ket amañ e zorc'hadur ster ; heñvel dra evit *re-*, *red-*, seul gent a se evit *naou(ez)*. Er pellgomz hon eus graet anv eus *ber-*. A-benn ar fin e kav din ez eo eñ an azasañ. Arveret eo bet endeo da sevel un nebeut termenoù Fizik : *berus*, *beruzenn*, *hever*, *heverenn* ; n'on ket arroutet war ar Reologiezh, nemet e hañval din an termenoù-se kouezhañ e tachenn an diskiblezh hep ma ve skoilh ouzh o arver e-kichen un termen Br. savet diwar *ber-* d'he envel hag a ve **beroniezh**.

Evit distreiñ da B II 1.a), e c'hallfed soñjal e **berreoler**, anez e spirfe **kasreoler**.

B II 2. – ER BEVED :

Gl. *rhéotaxie* "loc'hañ gant pesked 'zo a-zalc'h ouzh tu an dourred", Br. **gouerdrevn(egezh)**, termen a'm eus bet tro da ginnig c'hoazh (sl. KIS-366, La-09, pp. 172, 176).